



BALE EVEN

Var don : BALE ARZUR.

Energico.



Deomp, deomp, deomp, deomp, deomp d'ar stour-



mad! Var zao, Brei - zis, ha dal - c'homp



mad! Poun - ner hon dourn ha stard hon troad!

2
Distruja ' glaskont pep kristen,
Hor goad a ruill e pep tachen,
Deomp ha malomp hor bourrevien.

3
Hor merc'hedigou keiz gwallet ;
Hor bugaligou paour lazet ;
Gwa deoc'h, ma'cherien villiget !

4
Pullc'het deomp ken i ou ;
Devet, peurlaeret hor madou ;
Prim d'hor goarek, d'hon gafiou !

5
Deskomp, hirio, d'ar baianed
Penaos e stourmi ar Vretouned
Kris a galon, a benn kaled.

6
Deomp oll eta, deomp a strollad :
Maro 'vit ar vro, maro mad ;
Eurus 'neb a jomo 'r stourmad !

7
Deomp, deomp oll, deomp ha deomp laouen,
Kaer eo maro eur guir gristen
A varv 'vit harpa e greden.

8
Deomp, en em gannomp a zevri,
Hi wash hor Breiz, Breizis ompni,
Breizad pe 'varv pe 'rank trec'hi.

Diwar leor « Kanaouennou Kerne. »